

30

GUERZ NEVEZ.

Var un ton nevez



M'AM be aoüalc'h a studi, a speret da rima,
Hac ur bluen em dorn, ha me prest da scrifa,
Me gomposfe ur reglen ervez va santimant,
Var sujet un antretien entre daou zen yaouanc.

Mes qentavanç davantach me c'houlen asistanç
Eus ar sperejou caëra qent evit e c'hommanç,
Da rei lumier d'am speret pa meus occasion
Da ober ur son nevez ervez va intantion.

Pa lennàn ul leor bian zo en eayer va study,
Me a gav traou suprenabl hac a ra chagrin din,
Pa lennàn va flaneden scrifet gant va mestres,
Eus va brassa plijadur me meus tristidiguez.

Pavoan ebars em jardin em oll gontantamant,
Me remercas ur fleuren a voa yiê ha brillant,
Qen brillant e voa e deillou hac an eol ardant,
Pa deu dezàn para ebars ar firmamant.

— 2 —

Ounnes zo ur fleuren eus a velanconi,
 Antreet doun em c'halon ha diez da effaci;
 Prinç an oll amouroustet, roue an dud yaouanc,
 E c'hundu dre e sellou d'am renta languissant.

Qenta m'am boe an enor da velet va mestrez,
 E voa er porchet goude an oferen bred;
 An eil guech ma e guelis assuri a ellàn
 E voa ebars an ilis bet e communia.

O ober e fasq qenta e mesq ar vugale,
 D'ar poent-ze e voa yaouanc ha me a voa ive;
 Aben ur pennat goude e his d'arscolda Vengamp
 Hac hi er memes amzer a voa bars ur gouant.

Ma teuis da zilezel va education,
 Evit dont d'e antreteni eus a greiz va c'halon,
 Evit dont d'e antreteni Rouanes ar fleuriou ,
 Hac eus ar c'haëra fleur a zo er jardinou.

Ounnes a zo ur fleuren eus a velanconi,
 Caeroc'h evit fourdelis nac ive romani,
 Am eus dezi goenvi assuri a ellàn ,
 E lacai va c'halon var ar poent da rannàn.

An eil de a vis eost me lacas em speret
 Hac ive em fantazi mont da velet merc'het ,
 Mont da velet va mestres, Rouanes va c'halon,
 Va oll desir er bed-mâ , va inclination.

Debonjour dêc'h, va mestrez, an devez a hirie,
 Gant ur galon gontant evel zo ganeme ,
 Couscoude pa en em sonjân e voa din lavaret,
 Ne ran nemet coll amzer o tonet d'ho cuelet.

— 3 —

Sot oc'h sur, va servicher, ma teuit da gredi
 Ar goal deodou milliguet, zo o clasq hor separi,
 Ha pa vec'b din dispennet qermunut bac ar pell,
 Se ne rafe qet din-me donet do dilesel.

Pell so deuz a amzer me am boa desiret
 E teujac'h d'am saludi evel va muia caret,
 Ne larec'h guer ebet, ne rec'h qet a seblant,
 Me'm boa displijadur, mare doe plac'h yaouanc.

Traitorus milliguet! chenchit ho preposiou,
 Rac desianç a rit din pa lavarit ho comzou,
 Rac desianç a rit din pa glevàn ho comzou
 Ebars cayer va studi demeus ho preposiou.

Eleal, va servicher, va c'hredi a ellet,
 Rac me sinfe gant va goad ar pez a meus laret.
 Delc'het d'am darempredi a bet fidel din-me,
 Biqen na vemp separat an eil ous eguale.

Qen a deuio Doue d'hor guervel evit ar vech diveza,
 Da vonet da renta cont da Grouer ar bed-mâ.
 Qen a deuio ar maro da finissa hor bue,
 Biqen na vemp separat an eil dious eguale.

Me meus guelet va-unan differanç diouzin,
 Mari, Mari, va mestres, eus ho tarempredi,
 Ha tud a zo puissant, o deus renq ha leve,
 Me na meus qet avadou, goud aoüalc'h a rit se.

Ouspen da guementse zo emei, va servicher,
 Ar madou hac an arc'hant a eller da ober;
 Un den a vez demezet enep e santimant,
 N'ell qet terri e gontrat evit aour nac arc'hant.

— 4 —

**Qement so var an douargant va Doue crouet ,
An oll aour, an oll arc'hant en ur pres destumet ,
Hac even roet dime, ne vent qet c'hoas contant ,
Man'em be qet ar boneur da bossedi va e'hoant.**

**Me a meus grêt ur boqet demeus a zivision
Evit rei d'am mestrezic passetans d'e c'halon ,
Hac a meus grêt anezàn dimeus a huanad
A lacaio d'en erren ur ruban eus va goad.**

**O distrei eus ar pardon, ha var lein ar mene ,
Un devez dreist ar re al hi a laras dìn me :
Ma na guerit chanch a gontre pellât diouzin ,
Ar goal deodou milliguet a glasq hor separi.**

**Ounnes eo ar bromesse o poa-hu dime gret
Diveza m'am boe an enor va mestres d'o cuelet !
C'houi a brometas dime hac ive dre ho le
Na vijemp qet separat evit deus ho coste.**

**Var ben un nebeut goude int bet dispartiet ,
An effet eus ho comzou a so bet eprouvet ,
N'eus netra var an douar m'el assuri ervat
A sco un tol qen mortel evel ur goal deodat.**

**Pa voan ebars em guele nos gouel ar Rouane ,
Me glêve un eün em jardin hac a gane yiê ;
Lavaret a rê facil an eünic dre e son :
E ma da vuia-caret en desolation.**

**Deus ar mintin pa savis , me scrifas ul lizer
Da gaç d'am muia caret dre dorn ur messager ,
Da glêvet e santimant evit ar vech diveza ,
Guell eo meravel buan eguet chom da languissa .**

— 5 —

Pa erruas ar messager ebars ty va mestres,
 E voe diguemeret mat evit e ziveza guech,
 Qemer eure al lizer hac antren en e c'hambr
 Da scrifa dîn va c'honje neuze souden vantant.

O setanç a c'houlennit, emei, va servicher,
 Assuret oc'h de havet, ia, en bêr amzer;
 Ma visac'h d'am santimant, mad ec'h illit credi
 Na voa nemet ar maro capabl d'hon separi.

Mes na bremàn na goude, emei, se zo certen,
 An amzer dîn d'ho caret ne erruo biqen,
 Amzer dêc'h d'am c'haout ne aruo biqen;
 Pa em boa bolontez, e voa dêc'h va goulen.

Me zo ur minor yaouanc e poursui va studi,
 Hac am bezo er bлоa-màn calz a velanconi,
 Hac am bezo er bлоa-mâ eur galon glac'haret
 Estonet bras o velet na en em garriemp qet.

Pa deui an nevez-amzer, ar bleun bars er spern guen,
 E vo calon an dud yaouanc yiè ebars pep tachen,
 Ar fleuriou er jardinou a vo tout rejouisset
 Ha calon an dud yaouanc e pêvar c'horn ar bed.

Mes me savo un dourel var lein ar mene,
 Vis-a-vis da dy va mestres ha d'am hini ive,
 Da vouela gant glac'har d'am amzer tremenet,
 Da ober reflexion em planeden galet.

Pa voan-me deut ac'hane ur pennad euse zy,
 Ha me clêvet al lapousset er bot o fredoni;
 Ha me o chom d'o zelaou hac ive compleasant,
 Rac ar chanson a ganent a voa sur ravissant.

— 6 —

Cana a rent gercharmant, cana a rent qeryiè,
 Rejouissa a rent calon tout qement o c'hlêve,
 Ma commançjont lavaret dime i ve dre o moes :
 Petra dal dide, cloarec, qemer tristidigues ?

Petra ra did en em nec'hi er bed-mâ gant da chanç,
 Danve madou zo certen ebars en abondanç,
 Te so ebars er guêr gant da vam ha da dad,
 Ne c'heus nep nécessite a voued nac a zillad.

Ha me a zo e cana ha yiè va c'halon,
 Ha ne meus er bed-màn nep provision,
 Finissa res hep retard , neuze en un instant
 Ha rentet joaus bras calon un den yaouanc.

Guechal m'em boa un amzer a zesolation;
 Mes bremâ me zo joaus, triomfant va c'halon,
 Me a voar e gana bremâ certen, va mignonet,
 Evel an ene a ve barnet da vont d'ar joaustet.

Var ben un nebeut goude int bet en em gavet
 En ur plaça a goste o daou, elec'h m'e doa lavaret,
 Da renta an eil d'eguile ar pez o voa dleet;
 Ha da derri ar bromesse a voa etreze grêt.

Debonjour déc'h, va mestrez, emezàn, prontamant,
 Petra a zo a nevez en ho comportamant?
 Diveza ma ho cuelis e voa brillant ho sellou ,
 Ha bremâ n'o remercàn nemet o scuill daëlou.

Hac hi ho respont din, ia, en ur guir bêr:
 C'huiso qiriec d'am glac'har, emei, va servicher :
 Retornet c'hoas ur vech d'am c'haout, me so contant
 Da resina va buez evit cavet va c'hoant.

— 7 —

C'houi, certen, plac'h yaouanc, c'boui certen a so bet
 Arguenta gouarnerez imprimet em speret;
 Mes daelou va daoulagad o vouela nos ha de,
 O deus va oblijget da chench a volonté.

FIN.



GUERZ

Var un ton meurbet trist.

TOUSTAIT, calonou sansibl, selaouit gant silanç
 Ar recit eus va glac'har, trista experianç!
 Ar Fortun, en e c'holer, deut eus an eurustet,
 Ha dre mouvamant e rod e deveus va strinqet.